




# Brézh da Jezuz



Lizher Tiegezh Santez Anna Niverenn 54  
Miz Kerzu / Décembre 2025

## *Goulou da sklêrijennañ ar broadoù*

*Puer natus est nobis, et filius datus est nobis !* "Ur bugel zo ganet dimp, ur mab zo bet roet dimp !" Setu penaos e kan liderez Nedelec kevrin ar Verb - ar Gomz - en em c'hraet den evit hor silvidigezh. Hag a-hed ar c'chantvedou gant darvoud Ginivelezh ar Salver ez eo bet estlammet kalonoù an dud ha sklêrijennet ar broadoù. Ganti eo bet goulaouet Breizh iveau ha kaeraet he istor.

Ar re gozh a gont c'hoazh penaos er vro-mañ gwezhall, e-doug nozvezh Nedelec, e lugerne an hentoù kleuz gant gouleier leternioù ar c'hedourion o vont war-zu an ilizoù evit oferenn ar Pellgent hag o tistreiñ e-kreiz an noz ; ha kement-se dindan ar seizh avel !

Seurt Breizh kristen zo aet diwar-wel. Kalz ne ouzont ken zoken ez eus bet anezhi. Hogen e kalonoù ar feizidi e par bepred an hevelep goulou o trec'hiñ war deñvalijennou hon amzer.

En deizioù santel-mañ, e chapelig Lann-Anna ar Vouster, e lakaimp da sevel, a galon ganeoc'h, hor meuleudi d'ar Salver. E Tiegezh Santez Anna, "*dindan mantell santez Anna*", hon eus ar bri evit gwir da estlammiñ a-grenn-dost da C'hinivelezh Jezuz. Ha ni holl - pe e vefemp er Vreuriezh, pe er Genunaniezh, pe c'hwi ar vignoned ouzh hon gronnañ - hon eus iveau ar gefridi da zougen testeni da zonedigezh ar Salver, "*Goulou da sklêrijennañ ar broadoù*" (Lk 2,32).

Er bloavezhoù diwezhañ-mañ eo aet kalzik war-raok chanter Lann-Anna. Ar savadurioù rivinet tro-dro d'ar chapel zo bet ratreet ha goloet. Trugarez evit ho skoazell deoc'h-holl ! Koulskoude e chom pep tra da aozañ evit ma vefe tu d'o annezañ ha degas dre-se un sked nevez d'hon abostolerezh.

Ar chapel a vez gweladennet alies a-walc'h ha souezhet eo an dud a zeu d'he dizoleñ. Enni en em gav bemdez ar Vreuriezh hag e laka da sevel e brezhoneg meuleudi hag aspedenn an Iliz, mouezh Breizh e *Kan ar Pobloù* dec'hant gant ar Spered Santel !

Evel ur flammennig e-kreiz an noz, e talc'h eta Breuriezh ar Vouster, diwar briz lies aberzh ha lies striv a gantroidigezh. Er baourentez, gant ar bedenn hag al labour, deiz ha deiz, e ro korf da erbar Lann-Anna ... Trugarez da genderc'hel d'he skorañ !

An envodoù miziek a ro tu d'an tiegezh ledan d'en em stollañ : izili ar Vreuriezh, re ar Genunaniezh ha mignonned : prantadoù stummañ, lodennañ, lidañ, evit kas war-raok hor galvidigezh voutin. A-drugarez d'an emgavioù reolieck-se e c'hoarvez iveau gant tud nevez ober anaoudegezh gant Lann-Anna ha kaout un tañva eus hor galvidigezh.

Ur pennadig a-raok Pask ez eo bet gweladennet hor chapel gant Troveni Santez Anna a dremene dre ar Vouster en hent war-zu iliz Roudoualleg. Fromus eo bet degemer eilenn delwenn Keranna bet douget betek hor chapel gant ur redelig stlejet gant ur marc'h ha d'he heul pirc'hirined an droveni.

En hañv diwezhañ-mañ, eo bet brav ha Bourrus Miz Santez Anna gant an oferenn lidet gant an Tad Jean-Yves Le Saux e Lann-Anna. Hag evit klozañ, ez omp aet betek Plounevez-Moedeg e Bro-Dreger, ar vro hon eus bet da zougen en hor pedenn a-hed ar bloavezh tremenet.

Anaoudegezh broioù Breizh zo anezhi un hent dibar evit dizoleiñ an istor, ar sent, ar glad liesstumm, ha neuze mont gant lid meur ar C'heviun deraouet gant ar Pantekost. Kenderc'hel a reomp da skignañ kartenn ar broioù (e gwerzh, 15 euro e Lann-Anna) a zo evel ur prenestr digor evit dizoleiñ Breizh wirion, en tu all d'an dispennadur amaezhel.

A drugarez Doue e kendalc'homp gant hol labourioù disert war al liderez, meulganoù Liderez an Euroù (*Liturgia Horarum*), goueler ar sent hag all.

Gant al load e c'heller kaout ditouroù a-zivoud an obererezhioù-se ha prenañ ar Bibl en linenn, al levrioù oferenn hag all. Ha war ar c'henrouedadouù kevredigezhel, en un doare gougelek, e tougomp testeni eus karism Tiegezh Santez Anna.

Al labourioù hag obererezioù disert zo anezho kement a c'houleier o lugerniñ e-kreiz an noz evit mont davet an Arloz. Neuze, mignonned vat, a-gevret ganimp, enaouit ho leternioù hag it gant ar gwenodennouù en arbenn d'ar Salver ganet evidomp ! Boulc'homp hentoù e-kreiz an noz !



### *Lumière pour éclairer les nations*

*Puer natus est nobis, et filius datus est nobis !* "Un enfant nous est né, et un fils nous est donné !" Ainsi chante la liturgie de Noël. Et tout au long des siècles, l'évènement de la naissance du Sauveur a émerveillé les coeurs et illuminé les nations. Elle a également illuminé la Bretagne et enchanté son histoire.

Dans ce pays, les anciens racontent encore que jadis, durant la nuit de Noël, les chemins creux s'animaient de la lumière des lanternes des veilleurs qui se dirigeaient vers les églises pour la messe de minuit puis s'en revenaient au cœur de la nuit ; et cela sous tous les temps !

Cette Bretagne chrétienne a disparu. Beaucoup ne savent même plus qu'elle a existé. Cependant, dans le cœur des croyants, brille toujours la même lumière triomphant pour notre temps des ténèbres de la nuit.

En ces jours saints, dans la petite chapelle de Lann-Anna du Moustoir, de cœur avec vous, nous ferons monter notre louange au Sauveur. Il est vrai que dans Tiegezh Santez Anna, "*sous le manteau de sainte Anne*", nous avons le privilège de pouvoir nous émerveiller au plus près de la naissance de Jésus. Et tous - que ce soit dans la Fraternité de Vie, la Communion ou vous chers amis qui nous entourez - nous avons aussi la mission de témoigner de la venue du Sauveur, "*Lumière pour éclairer les nations*" (Lc 2,32).

Ces dernières années, le chantier de Lann-Anna a beaucoup progressé. Les bâtiments ruinés autour de la chapelle sont désormais tous relevés et couverts. Merci pour votre aide à tous ! Mais il reste tout à faire pour les rendre habitables et ainsi assurer un nouveau rayonnement à notre apostolat.

Déjà, la chapelle est souvent visitée et suscite l'étonnement de ceux qui la découvrent. Tous les jours, la Fraternité s'y retrouve et fait monter en breton la louange et la supplication de l'Eglise, voix bretonne dans le Chant des Peuples suscité par l'Esprit Saint !

Petite flamme dans la nuit, la Fraternité du Moustoir se maintient au prix de bien des sacrifices et d'efforts de conversion. Dans la pauvreté, la prière et le travail quotidien, elle permet au projet de Lann-Anna de prendre corps jour après jour... Merci de continuer à la soutenir !

Les réunions mensuelles permettent à la famille élargie de se retrouver - membres de la Fraternité, de la Communion, amis - pour des temps de formation, de partage, de célébration, afin de progresser dans notre vocation commune. Ces rencontres régulières permettent aussi à de nouvelles personnes de faire connaissance avec Lann-Anna et de goûter à notre vocation.

Un peu avant Pâques, notre chapelle a reçu la visite de la Troménie de Sainte Anne qui passait par le Moustoir en se dirigeant vers l'église de Roudouallec. Ce fut émouvant d'accueillir la copie de la statue de Keranna portée jusqu'à notre chapelle sur une carriole tirée par un cheval et suivie des pèlerins de la troménie.

Cet été, le Mois de Sainte Anne a été particulièrement bénî avec la messe célébrée par le Père Jean-Yves Le Saux à Lann-Anna. Pour conclure, nous sommes allé jusqu'à Plounevez-Moëdec dans le Trégor, pays pour lequel nous devions prier tout au long de l'année passée.

La connaissance des pays bretons est un chemin privilégié pour découvrir l'histoire, les saints, le patrimoine dans sa diversité, afin d'entrer dans la grande célébration de l'Alliance inaugurée à la Pentecôte. Nous continuons à diffuser la carte des pays (en vente 15 euros à Lann-Anna), fenêtre ouverte sur la découverte de la Bretagne réelle au-delà du dépeçage administratif.

Grâce à Dieu, nous poursuivons nos divers travaux en faveur de la liturgie, les hymnes de *Liturgia Horarum*, le martyrologe etc.

Le site internet rend compte de ces diverses activités et permet la vente en ligne de la Bible, des livres de messe et autres ouvrages. Plus généralement notre présence, encore discrète, sur les réseaux sociaux, témoigne du charisme de Tiegezh Santez Anna.

Ces divers travaux et activités sont autant de lampes qui brillent dans la nuit pour aller à la rencontre du Seigneur. Alors, chers amis, avec nous, allumez vos lanternes et lancez-vous sur les routes à la rencontre du Sauveur qui est né pour nous ! Ouvrons des chemins dans la nuit !

*Les règles tarifaires très strictes de la poste nous interdisant d'ajouter un quelconque message personnel à cet envoi en nombre nous tenons à vous témoigner à chacun de notre proximité et de notre prière pour vous et les vôtres.*

*Abalamour da ziferadennou feurbriz peurstrizh an ti-post ouzh hon berzañ da ouzhpennañ nep kemennad hiniennel d'ar gasadenn a-niver-mañ, e fell dimp dougen testeni eus hor mignoniezh da bep hini ac 'hanoc'h ha lavarout emaoc'h, c'hwi hag ho tud, war hor pedenn.*

